




Bleun-Brug Lokronan, d'an 2 a viz Even, a zo bet eur pardon kaer

BLEUN-BRUG

Niv. 101 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GOUERE 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Me gar ar mor, gand L. B.	1
Bleun-Brug ar pardonieu, gand Edon Eno	2
Eur wall droiad pesketérez, gand Job Seité.	5
Prezegenn person koz Lanbaol, gand Mab an Dig.	8
Teñzor ar brezoneg beo, gand V. Favé	13
Keleier	16

skol-hañv ar Bleun-Brug

Skol-hañv ar Bleun-Brug a vo dalhet, er bloaz-mañ, n'eo ket e miz Eost evel ma 'z eus bet skrivet dija, med euz an **2 d'ar 6 a viz Gwen-golo**, e Skol al Likès, e Kemper. Renet e vo gand an Ao. **Chaloni Falc'hun**, kelenner e Sko-Veur Roazon, gand **V. Seité** (Urz Frered Ploermel), **K. Riou** (Uuz Frered St Gabriel) hag ar Fr. **Cyrille-Léon** (Urz Frered de la Salle).

Bez' e heller, azaleg bremañ, kas an ano da V. Seité, Bleun-Brug, Châteaulin (Fin.).

Ar skolidi a zigouezo d'an 2, a-benn koan. Digoret e vo ar skol dre eur gaozeadenn, greet gand an Ao. Fave, Vikel-Vraz, da 20 h. 30. An overenn, d'ar 6 diouz ar mintin, a glozo ar Skol-hañv.



133851

ME GAR AR MOR

Cheñch a ra an traou !

Muioh mui ar vakansou, kemeret gwechall evid amzer gollet, a deu da gaoud o 'flas e buhez an dud.

Teir zizun, adaleg vremañ, da beb labourer hag a vezo ranket astenn c'hoaz, dre ma 'z aio ar mekanikou war stankaad !

Ar hirri-tan a ro muioh mui a êzamant da vond pell diouz ar gêr, da foeta bro, da glask an êr vad hag ar yehed war ribl ar mor, koulz hag e dounder ar méziou kuzeta.

Eüruz ar re a hello evel-se cheñch êr, hervez o 'faitazi, ha kemered diskuizou e baleadennoù yahuz !

Kalz a zo, siwaz, dalhet gand ar berrentez arhant, gand o ziegeziou pe o atañchou, ne hellint mond da neb leh.

Eur holl gwirion eo evito ! Rag ma ra vad a-wechou kuitaad ar gêr evid he hared muioh goude ze, petra zo talvoudusoh eged gelloud terri an nask, beb an amzer, evid avei ar penn ha laouennaad ar spered ?

« Heb eur begad pebr hag hollen
e kaver gouar ar zoubenn.
Evel-se ma n'ho-peus bemdez
nemed labour tenn hag enkrez
e vo divlaz ho terveziou...
Red eo plijadur a-wechou... »



Hag e peleh kaoud brasoh, c'hwekoh plijadur, e-pad an deiziou hañv, eged mond da weled ar mor, eged lonka, a-leiz or skevent, an êzenn-vor, eged sauba on treid hag or horv en e zour strobinnelluz ?

Ar vourhizien, ha kêriz, ne faziant ket, i, hag a welom o redeg a-vernioù, beb sul, ha beb gouel, war-du on aochou, a deu an tarziou hag ar gwagennoù, gwech ha gwech, da lipad pe da zistamma ar reier kaleta.

Aochou or Breiz-Izel gand o 'flegou, o gwaskou, o hompezennoù, o zorgennoù, bez' eus e broioù all tommoh, brudetoh egeto, n'eus ket kaeroh evid sellou an den ! N'eus ket par dezo da rei d'or hornig bro eur gened ha ne vez ket kavet e leh all !

Ar mor hag a ra evel eur houriz hlaz an dro d'on douar, kanet eo bet, a-hed ar hantvejoù, gand or barzed. E gwerzioù trist, ar re-mañ o-deus embannet e nerz, e halloud e grizder... E sonioù dudiuz o-deus greet ive meuleudi e ehonder, e vadelez, e binvidigez, e goantidigez...

An dud a Iliz o-deus kavet ennañ eur bern kentelioù ha skeudennoù beo, a zo gand ar re nerzusa evid or ren war hent ar Baradoz.

Lennit hag aslennit or hantikou brezoneg hag e weloh leun a gomzou kaer war ar poent-se.

« O vale war an aot gwenn-kann
dirag ar mor braz ha ledan,
gand plijadur me 'zoñj bemdez
e braster an Aotrou Doue... »
« O Breiz-Izel
me gar ar mor, ar mor dispar
a ra an dro d'az touar... »

L. B.

Bleun-Brug ar pardonioù

Lokronan 1-2 a viz Even

« Euz Lokronan Koad-Neved, war Bro-goz ar Porzou,
« Sonit kleier benniget, son galv or pardonioù.
« Ha c'hwi klohig Sant Ronan, laouen ha gand dudi,
« Sonit, sonit an « Hirglaz » da zond d'an Droveni. »

N'eo ket evid Troyeni Vraz Lokron eo e-neus sonet, er wech-mañ, klohig Sant Ronan, med evid Bleun-Brug pardonioù Breiz.

Ranell eo lavared goude peb Bleun-Brug : « Kaer dudiuz eo bet peb tra ! kaerra Bleun-Brug a zo bet biskoaz ! »

Evid peb hini, ar Bleun-Brug bet en e gorn bro, eo bepred an hini kaerra. Gwell a-ze. Den ne gavo abeg e kement-se.

Kaer dispar eo bet an amzer evid pourchas Bleun-Brug Lokronan. Kaer dispar al leh, ha kaer dispar an devez. Eun tammig re domm, marteze.

Ar veilhadez « Noz a gan ».

Goulennet e oa bet digand « Kanerien an Arvor » euz Douarnenez, ober ar veilhadez dindan porched an iliz.

N'eo ket bet ar veilhadez-se, hervez ar pezh a hoantaem. Re hir eun tamm, ha re a ganaouennou ha ne zellent ket ouz ar Bleun-Brug. An eil lodenn, avad, oh echui gand mister Salatin ar Folgoad, a zo bet kaer kenañ ha fromuz. « Kanerien an Arvor » a zo kanerien ampart ; krog o-deus war ar zelaouerien, ha gouzoud a reont an tu da rei buhez d'o hanaouennou.

En trede lodenn on-eus bet ar blijadur da glevet Laz-Kana Plougerne. Ma oant kaer da glevet, e oant ken kaer all da welet gand o dihañjou breizad. An noz sioul ha steredennet a dregernas laouen gand o hanaouennou ha Breiz a-bez a dridas, ouz o hlevet.

Eun toullad mad a dud a oa diredet d'ar veilhadez-se. Goude ar hanaouennou, an iliz en em gavas leun evid bennoz ar zakramant.

Prosesion ar goulou, warlerh, a gasas an dud betek an tan'ad : « Eur bern strouez ha lann, a sirinkas, en abardaez, e elfennou er vann ». Ar blasenn vraz, gand he ziez koz, en em gavas neuze sklerijennet evel e-kreiz an deiz, e-keid ha ma tregerne kantig Sant Ronan.

Pa viannaas an tantad, e oe elumet tanou « bengale » war an tour ha gari-dou an iliz. Eun dudi a oa neuze arvesti ouz peb tra.

E-doug an abardaez penn-da-benn, oll brenestou ar blasenn a zouge piledou war-elum ar pezh a roe dezi eun neuz dreist-ordinal.

Kenstrivadegou.

Azaleg 8 h. 30, Skol ar Seurezed en em gavas leun a vugale, koulz lavared oll gwisket e breizad. Ped a oa anezo ? diêz e vo gouzoud : 301 a genstrivo a unanou. N'eo ket bet kontet, avad, ar re o-deus kenstrivet a strolladou. Ouspenn, tri laz-kana euz skolachou St-Yves, St-Loeiz hag al Likès, en oll 280 a vugale o-deus greet muioh eged kenstriva, p'o-deus desket peb hini 6 kanaouenn vrezoneg. War dachenn ar skol, e heller lavared, e-neus adarre ar B.B. greet labour-vad.

Overenn-bred.

Re vian eh en em gavas iliz vraz Lokronan evid an overenn-bred, kanet gand an Ao. Chaloni Salaun, ensellour, ha prezeget gand an Ao. Chaloni Abguilerm aluzenner e Douarnenez : brezoneg flour ha yah, a roas da anaoud kente-liou eur gwir bardon.

Ar hanou santel a oe roet gand lazou-kana St-Loeiz Kastellin, al Likès ha St-Yves Kemper ha Plougerne : eun dudi ! Ar re o devezo bet an eur vad da glevet an overenn-bred-se, a jomo skoet da viken.

Abadenn koroll, son ha kan.

Da 14 h. 30 e tigure an abadenn vraz, en eur park ouz torr ar menez, tostig d'ar vourh. Ar gwel n'hell ket beza kaeroh e nebleh all. Dreist toennou an iliz ha tiez koz ar vourh, pleg-mor Douarnenez, beteg Beg ar Raz. Muioh a zeou, ar Porze ha Mene-Hom. Netra nemed evid gweled ar vroad, e talvez e ar boan mond di.

E-pad div eur e tremenas war ar podium kelhiou, bagadou ha lazou-kana. Red eo anzav en abeg d'an dommder eo bet al lodenn-mañ re-hir, ha skuizuz abalamour da ze. Red e vo, kousto pe gousto, en amzer da zond, berraad al lodenn-mañ. Gwelet e oe war ar podium, ouspenn al lazou-kana meneget dija, kelhiou Plestin, Plougastel, Kastellin, Bannalec, Kerfeunteun, Douarnenez, Pouldreuzic ha Lokronan. Bagadou Koad-Serho, Brest (ar Flamm), Kastellin, Kombrid, Bannalec, al Likès, St-Youenn, Pouldergat ha Pont-e-Kroaz.



Sonerien al Likès e Bleun-Brug Lokron.

Jeu scénique « Pardonioù Breiz ».

Gwella jeu scénique bet savet beteg-henn, o-deus lavaret meur a hini. Ijinet eo bet gand Bernard de Parades ha renket gand Visant Seite. C'hoariet eo bet, dreist-oll gand tud Lokronan, braz ha bian. Ar hanaouennou e-doug ar hoari penn-da-benn, a zo bet roet gant laz-kana Plougerne, sikouret a-wechou gand

lazou-kana al Likès, St-Loeiz ha St-Yves. An oll ganaouennou roet e-doug ar « jeu » a zo bet tennet euz kantikou or pardonioù brùdeta, evel Santez Anna, Rumengol, St Ronan...

17 taolenn veo a dremenas dirag ar zelaouerien o rei da houzoud liez-doare or pardonioù, penaoz int bet ganet, jestroù ar bardonerien hag an ofisou santel. Evel-se, goude beza plantet ar groaz, gwir vanniel Breiz, e tremenas tro ha tro war ar podiom an iliz parrez, ar chapel, ar 'feunteun, an tantad. Goude e oe diskouezet ar bardonerien o tond diarahenn, war gorr o roched, evid ober pini-jenn ha kaoud ar pardon euz o 'fehejou ; ar bardonerien ive o tond da houlenn grasou evid ar bed-mañ. Goudeze o tiskouez o anaoudegez vad, dre ginnigou a beb seurt, o kana kantikou.

Warlerh ar bardonerien e oe diskouezet ar parrezioù o tond da bardona, gand o hroazioù hag o bannieloù o pokad da groaz ha da vanniel ar pardon.

Ar hleier o devoe ive o flas. Kleier kosa an eskopti : kloh Sant Ronan, kloh Sant Goulhen euz Goulhen ha kloh Sant Paol-a-Leon, o zri euz ar 6^{vet} kantved, a zonas dirag an dud, gand oll gleier ar barrez. Kerkent e krogas an overenn-bred.

Warlerh, goude beza diskouezet petra 'ra an dud goude an overenn-bred, e oe kanet ar gousperou war an tonioù braz : daou pe dri boz euz « Dixit Dominus... » Ar « Magnificat » a strakas neuze, o tigas war e lerh eur brosesion euz ar re gaerra : eun ugent parrez bennag a ziwar-dro, an oll dougerien gwis-ket gand dilhad breizeg.

Nelra nemed o weled an dud e-doug an abadenn-se, e oa êz gouzoud pege-ment e oa plijet ha skoet. En em lakaad a rejont o-unan e-barz ar « jeu » ha kalz a heulias goude ar brosesion beteg an iliz evid bennoz ar Zakramant, en eur gana a greiz kalon kantig Sant Ronan.

An Ao. chaloni Fave, Vikel Vraz, eo a glozas ar gouel gand eun nebeud komzou c'hweg tarzeta war eun euz e galon : « Bretoned Breiz, diskouezet eo bet deoh teñzorioù ho pro. Tridet oh eus dirazo. Deoh-c'hwil bremañ da lavared pe e fell deoh beza fidel dezo, pe o dilezel da viken. »

Edon Eno.

GERIOU - KROAZ

S	P	E	R	N	
T	A	S		E	Z
A	L	P	O	U	
N		E		D	I
K	A	R			N
A	R	N	E		T

Diskoulm da gudenn an niverem 100

A-Bien. — 1. Ar paotr-se a droh ar geot d'ober foenn. — 2. O koinz diwar benn eun tamm kousk, goude kreisteiz, peotramant an diou vogalenn gentañ. — 3. Ar hig hag al legumach a vez debret e-giz-se. — 4. Toud. — 5. Eun dra ho-peus touet d'ober. — 6. Buander, pe neuze ar pezh a ra an dour o redez.

A-Zerz. — 1. Ar pezh a zo bet greet da lakaad an arreburi (ar meuble) da lufra. — 3. Eul loen a hall nijal. — 4. Ne vez gwelet hennez nemed e-pad an deiz. — 5. Eur gomz a lakeom war lerh an traou na gomzom ket diwar o 'fenn. — 6. Liou a laka an taro da fulori. — E-barz.

	1	2	3	4	5	6
1						
2						
3						
4						
5						
6						

Eur wall droiad pesketerezh

(kendalh)

Gand Job Seité.

Saveteet !

E tro 9 eur, e klevan skei war dor va hanbr, va mamm a deu en diabarz gand eun den n'anavezan ket. Va mamm a drid gand al levenez : « Saveteet int ! » emezi. — « Saveteet ? n'eo ket posubl ! Bennoz da Zoue neuze, rag eur burzud eo euz ar haerra. Med peseurt kelou a zo degouezet ? » Hag an den a zo aze, hag a deu war-eeun euz Sémaphor Kerisog e Plougerne, a zispak dirazon eur baperenn warni kement-mañ o tond a-berz ti ar prefed a vor euz Brest :

« Sémaphore ar Creac'h. Enez Eusa. Lestr spagnol *Aurora*, etuz Bilbao, o fond euz ar biz, hent ar hreisteiz, a ro da anaoud e-neus kavet diouz ar mintin eur vag ha tri veleg gall. Goulennet outañ e pe leh ? Gwiseni, e-neus respontet.

Degemeret e Kerizog a-berz ti ar prefed a vor gand an telegrafist Tempier. »

Goude beza lennet hag adlennet ar baperenn briziuz-se, e lavaran eur bedenn evid trugarekaad Doue hag eh en em roan da gousked mort, dibreder, beteg ar mintin war-lerh.

Da beleh ez a an AURORA.

Bremañ e chom, ganen eun dra da ober : gouzoud da beleh ez a an *Aurora*. Diouz ar helou deuet deom, ar vatimant a oa euz Bilbao. Kas a ran eun telegram d'ar honsul gall euz ar gêr-ze evid erbedi dezañ an tri veleg. Hemañ a respont e oa an *Aurora* euz Bilbao, med e teue euz Newcastle da Jenova ha ne drofe ket diwar he hent. Red eo neuze kas eun telegram all d'ar honsul gall e Jenova. Ouspenn, an Ao. Gayraud, on depute, an Ao. Rouvier, rener kuzul ar vinistred, a reas ar pezh a zo red evid ober dezo kemered hent ar gêr, pa vijent erruet ero.

Penaoz e oent saveteet.

Or mignoned, evel m'ho-peus gwelet, o-doa lezet war o lerh aot Kerlouan, war-dro 4 eur diouz an noz, d'an 3 a viz Eost. An avel, o c'hweza diwar ar hreisteiz, e-noa o bountet war-zu an hanternoz. Da Zoue o-doa greet sakrifis o buhez ha petra da ober nemed soubla, gortoz ar maro ? Treh d'o nervernou, e pedent, e kanent kantikou, o soñjal oa deuet moarvad o eur ziweza, edont o vond dirag Doue. N'edont ket o-unan o pedi. War or roh, e-pad an noz, on-doa lavaret meur a *Ave Maria* evito hag e, Gwiseni, pa deuas beteg eno ar helou glaharuz-se, e oe ive pedet c'hweg. Den ebed, war ar pezh a zo asuret din, n'oa deuet dezan ar zoñj da lavared evito an *De profundis*, med goulennet e oe gand fiziañs digand Doue o zavetei. Pedi a oe greet ar Werhez ha Santez Anna, dirag ar zantez-mañ en iliz, a-hed an noz, gouleier a jomas war elum.

Ar pezh a gontas an Ao. Gall.

Lezom bremañ ar gomz an Ao. Gall, unan euz an tri a yeas beteg Jenova euz aot Kerlouan.

« Ne glaskin ket dond war an noz on-eus tremenet er vag. A forz da veza taolet ha distaolet gand ar mor, on aon a nij kuit, koulz lavared. Dond a reer da veza boaze ouz peb tra. Beb an amzer, gand or boutier, e houlonderom ar vag euz an dour a strinke enni diwar an tarzioù a zave o 'fenn uheloh eged ar re all. Gled-dour-teil eo on dilhad.

Pa zeu an an deiz, e klaskom furchal an dremmwel evid klask bag pe zouar a hellfe or zavetei ; med na dour, na bag, na roh ne welom, kaer on-eus sellad en dro deom, netra nemed ar mor braz, fin ebed dezañ, kounnaret atao. Koulskoude ne gollom ket ar fiziañs : ar Werhez on-doa pedet gand kement a galon a zo ker madelezuz ha ker gallouduz !

Div eur a zo eo deuet an deiz, ha netra atao war wel. Pebez rann-galon ! Goude beza dalhet penn ouz ar gorventenn, daoust ha na vijem ket kondaonet da vervel gand ar riou ha gand an naon !

Da hweh eur hanter, an Ao. Prigent a zeblant gweled eun draig bennag. Gand aon na vefe faziet, ne lavar grik, med kendelher a ra da bara e zaoulagad war an dremmwel. Ar pik du a deu war vrasaad : « Eur vag ! » eme an Ao. Prigent. Dioustu e reom sin da zond war or zikour. An aotrou person a stag e vouchouer fri ouz eun avenell, an avel a zo ken kreñv ma freug anezañ e daou hanter. Sevel a reom eur rocñv : red eo esperoud e vim gwelet.

Gouzoud on-eus greet goude-ze oam bet gwelet a-raog m'on-doa grêt sin ebed. An eil-mestr war an *Aurora*, a zelle ouz ar mor gand eul lunedou da weled a-bell, a oa kouezet e zellou warnom. « Pesketerien, emezañ, eun diaoul a amzer evid pesketa ! » Gweled a ra goude zé or signaliou hag or zoutanen-nou : « Tres padres ! tri beleg, hag o-deus an êr da houlenñ sikour ! » Dioustu ez a da gas ar helou d'ar habiten. Hemañ a ro urz da zond war-zu ennom. Ar vag a dosta ; eul lestr dre dan eo. Degouezoud a ra dirazom : an dud war ar pont a zell ouzom mantret. Astenn a reom on divreh, ha war a zo lavaret din goude ze em-oa youhet a-bouez-penn : « Saveteit ahanom, saveteit ahanom ! » Marteze oa pa weljom ar vatimant o trei warni heh-unan hag o pellaad diou-zom. Daoust ha kuit edo o vond ? Nann, rag red oa dezi en em gemered evel-se evid trehi an tarziou hag an avel. Dond a ra neuze diwar a-dreñv tost deom.

Taoler a reer deom boeiou : goude beza eet hebiou meur a wech war ar re genta, e teuom a-benn ar fin da gregi en unan. Krog mort enni, e tostaom ouz an *Aurora*. Taolet ez eus deom goude ze eur gordenn, a zo staget dioustu gand an aotrou person ouz or bag. Sabatuet e chomom neuze pa welom o rikla war-zu ennom, a-hed eur gordenn o tistrilha ouz an *Aurora* eur martolod spagnol a lamm en or bag. Peb tra evid or zavetei a zo gantan. Staga 'ra an aotrou person, a zav war ar vatimant dre eur skeul greet gand kerdin. Degouezet war ar pont, eo harpet gand daou vartolod e gas war-zu eur gambr. A-raog e tistro d'ober eur zell warnom ha p'or gwel ive war ar pont e lavar : « *Deo gratias* ». Euz ouspenn diou vunutenn n'eus ket bet ezomm evid or zavetei.

Or bagig, gand ar pezh a oa enni, avenellou, chifrevez hag all, a zo lezet da vond gand ar mor.

An « Aurora ».

Kenta tra a reom, eur wech degouezet war al lestr, eo cheñch on dilhad gleb-teil. An aotrou person a wisk dilhad ar mekanisian, ha ni, dilhad martoloded euz or ment. Eur banne kafe, hini kreñv ha hini mad, a zegas tommder ha nerz en on izili.

Ar wall amzer a gendalh. N'eo ket heb poan e chomom en or zav war bont al lestr, a zav hag a ziskenn, a gostez a-wechou war ar marhad.

Bez eo an *Aurora* eul lestr glaouer, dezañ war-dro kant metr a hirder, gand 9.000 tonennad glaou en e vourz. Euz porz Bilbao eo, med peurvuia ez a hag e teu etre Newcastle ha Jenova. Glaou a gemer e Bro-Zaoz hag en dizro e teu gantañ kouevr euz ar Spagn.

Tremen a reom dirag Enez Eusa. Goustadig ez eom war-raog ; ar mor a zo atao fall kenañ. Da Jenova ez a an *Aurora* ha n'hell ket kuitaad e hent.

Ar vuhez e bourz ar vag.

Stad a oe greet ouzom gand an oll, euz ar habiten beteg ar vartoloded. Ne vank n'ra deom : boad mad kafe, batun, n'eus forz pegement. An aotrou person koulskude ne fume ket, prizad avad e-nije karet ober, med siwaz n'oa ket a vutun priza war ar vag. Ar Spagnoled avad a deuas a-benn da ober. Kraza a rejont butun fumi ha goude ze e oe malet munud. Er giz-se e teujont a-benn da rei dezañ bemdez e lodenn vutun priza.

Dond a-benn da gousked a oe eun afer all. Chadenn ar stur a ree eun trouz spontuz, a egare ahanom. A-wechou e krede deom edo al lestr o tiskoacha.

Sul, 6 a viz Eost.

Hirio oa d'an aotrou Prigent kana e overenn genta e Gwiseni. Her rei a reom da anaoud d'ar Spagnoled a hoarze : « Ne vo nemed kaerroh diwezatoh, goude an darvoud-mañ » a lavarjont.

War ar mor braz.

Kerzoud a ra or bag war-raog, war he dousig, hag an deiziou a dremen da heul red an dour hag or bag. E pleg-mor ar Gwaskogn e stagom da rei an dorn evid pesketa ton. D'an 9 a viz Eost, e welom en dremwel aot ar Portugal, goude ze hini ar Spagn, hag erfin gouzoug-mor Jibraltar. En eur dreuzi an tachad-mañ e hellem gweled êz roh uhel Jibraltar euz eun tu, kerreg ar Marok euz eun tu all.

Jenova : lun 14 a viz Eost.

Or beaj a gendalh meur a zervez c'hoaz. D'ar 14, setu Jenova dirazom. Kalz listri a zo er porz hag on hini a gemer ive e blas ouz ar hae. A-veh degouezet, e teuer da lavared deom ez eus goulenn deom. An hini a zalh er gêr-mañ karg ar honsul eo a zo dirazom en eur vag vihan. Kelou a zo degouezet gantañ a-berz an aotrou Uguen euz Gwiseni hag urz digand an Ao. Rouvier, rener kuzul ar vinistred, d'on distrei d'or bro.

Kenavo d'an « Aurora » ; an distro.

Trugarekaad a reom a greiz kalon or zavetaerien a-raog lavared kenavo dezo ha kuitaad o lestr. Kenta tra a reom, pa zegouezom e kêr, eo kas kelou da Wiseni. Ano a zo ahanom war gazetennou an Itali hag ar Frañs. Beb a zoudanenn nevez a zo prenet deom, beb a dok ha beb a re voutou gand ar houarnamant. Paperiou evid gelloud treuzi harzou ar vro a zo roet deom ha d'ar 15 diouz ar mintin, ez om prest da vond en hent.

Da 9 eur diouz ar mintin e lohom euz Jenova. D'ar 16, da zeg eur diouz an noz, emaom erruet a nevez e Gwiseni, goude beza tremenet dre Torino Pariz ha Landerne.

Setu aze penaoz eh echuas on droiad pesketa : eet euz Gwiseni d'an 3 a viz Eost da 9 eur diouz ar mintin, e tegouezem en-dro d'ar 16 da zeg eur diouz an noz.

Da viz Gwengolo, or pemp ez eom da Lourd. Eno, an aotrou person a brezegas e iliz ar Rozer a war galloud ar Werhez. Eur gaer a brezegenn a reas hag euz e wella e reas evid diskouez n'hell ket ar Werhez dilezel ar re en em erbed outi e kreiz ar riskl.

Daou vloaz goude-ze.

D'ar 14 a viz Gouere 1907, eur vatimant spagnol euz Bilbao, an « *Amboto* », kollet gand ar vrument, a en em daolas war reier Kerlouan, nepell euz al leh m'oa bet sammet gand ar mor aotrou person Gwiseni. An oll vartolod a oe saveteet. En o zouez, pebez sebezenn ! ez eus unan euz martoloded an *Aurora*, Francisco Seja, o tizrei da Vilbao.

An aotrou Gall, deuet war al leh, a reas a nevez anaoudegez gand e zaveteer koz. Martoloded an *Amboto* a jomas ouspenn eur miz e Kerlouan, rag klask a oe greet tenna ar vatimant a-ziwar ar reier. Poan gollet koulskoude : kaer a oe esa, netra d'ober. Ar vartoloded a zistroas d'o bro gand an hent-houarn. E-pad an oll amzer ma chomjont er vro, Francisco Seja a dremenar ar braz euz e amzer e presbital Gwiseni. An aotrou person a oe iaouen o diskouez evel-se e anaoudegez-vad e-keñver e zaveteerien.

Meur a wech e teuas gand ar pemp beleg ano euz an *Aurora*, euz o wall droiad pesketa a gasas anezo euz reier Kerlouan beteg Jenova.

— ECHU —

saout lanbaol

PREZEGENN PERSON KOZ LANBAOL

Pell zo abaoe, peogwir Gwitalmeze a oa e Gwitalmeze goz, Gouranou a oa stag ouz Lanbaol, Kerzivoret n'oa ket c'hoaz divoret; eur houerenn vor heñvel ouz Aber Sant-Pabu a deue beteg liorz ar presbital.

Ar mor a holoe ive Treompan beteg Penn al Lenn ha beteg Kerlanou, keria-denn al lano...

Etre an tre hag al lano
e hell peb hini lakaad e ano

a lavare on tud koz!

Tevennou Gwitalmeze a oa eta dindan zour: ar pezh a zispleg deom penaoz tevennou Lanbaol a zo d'an oll; hag e Gwitalmeze, pa 'z eas ar mor kuit, an dud a lakaas o hraban war an tammou douar a hellent paka! Morse den ebed n'eo deuet a-benn da lakaad sklerijenn war gwiriou peb hini e tevennou Gwitalmeze. Er hantved diweza e oa ranket degas soudarded euz a Vrest da lakaad ar peoh e-kichen Leztevenn.

Eur houerenn vor a yee dre vali ar Froud. E Lestremeur edo an Treiz braz ha tud Kervizin a gave bizin en Toull harp en o dor. An Tregerien a dlíe beza oll treizerien.

Er hontrol, ar Beg hag enez Roservo — evidon me Droser-mor pe Krozer-mor — a oa stag ouz an douar, hag er Porzig e oa eur chapel.

Pell! pell zo eta abaoe!

Lanbaol a oa bet digaset dezi skléríjenn ar Feiz gand meneh Sant Paol. Ar veneh a zekas ive d'on tud koz labourad an douar. Ar veneh eo o-deus diwezatoh savet an tour kaer dantelezet a welom bremañ, kement a fouge ennom, o lugerni melenet d'ar pardaez dindan bannou diweza an heol, tre ma tro war-dro d'e veg bandennadou brini du.

Nag a boan o-deus kemeret evid sevel an tour-ze hag an iliz ken koant! Leun a eienennou a zo dindanno hag ar veneh o-deus ranket a-raog o zevl lakaad karradou ha karradou gwez-pin en o gourvez dindan ar mogerioù.

Lanbaol savet gand tud santel a dle chom atao santel.

Allaz! allaz! d'an ampoent, Lanbaol a ankounac'hee! Ar feiz a goueze! Tud euz a Houranou, euz a Gerlanou, zoken euz a geriadennou all chomet stag ouz ar barrez a zileze hent ar feiz!

Me 'm-eus gwelet an dra-ze war baperioù koz. Rag paperioù koz Lanbaol n'int ket bet debret gand saout Lezivoute!

M'hel lavar deoh, kouezet oa izel parrez santel Lanbaol!

Laeron a oa enni: laeron euz o micher, ha re all gwasoh egeto ha n'oant ket laeron euz o micher.

Kannou a veze beb sul, gand koadennou e Kroaz al leur-gêr.

Pa deue eul lestr da bensea, eh eved gwin ha gwin-ardant gand ar bouteier, klevet a rit! Ha pa ne veze ket a bense da zastum, ar wazed eo a gaved da bensea d'ar zul da noz!

Ar merhed o-unan a oa leun anezo o-doa devet beg o fri, ha n'oa ket gand eoul debri!

Badiziantou a veze goude kloh an Anjelus.

Ha nag a draou all. Gwelloc'h ganin rei peoh dre garantez evid va 'farrezig!

Ar person koz a oa maro. Truezuz oa bet e zoare. Tud Lanbaol o-doa ankounac'heet o deverioù e-kenver o 'fastor. Hag hemañ, evid beva, a ranke mond diou wech ar zizun da Zant-Pabu. Eno e oa eur person mad. Euruz oa d'an ampoent (koulskoude Sant-Pabu he-deus bet ive hed ar hantvejou he frapadou terzienn) hag e roe da berson kaez Lanbaol eur sahad farz beb taol.

Ar person koz a oa maro hag eur person nevez a deuas.

An dud eet d'henn diambroug, o weled e vleo gwenn, e gein krommet, hag e vale hanter strob, a zoñjas: « Evid hemañ, da vihana, ne ray ket aon deom. » Soñj a deue dezo, ouz e weled, euz ar person o-doa bet eun tachad a-raog.

Koz, koz kenañ oa, ha da zeiz Nedeleg eur bloavez, oa bet o c'hoari domino gand e gloher, a-raog an overenn hanternoz. Goude ar *Kyrie eleison*, ar person koz ne zave ket en e zav.

Kaer oa henn heja, netra d'ober. « Maro ar person » a zoñje Lanbaoliz. Nann, kousket n'oa ken. Ar hloher, eun den a ijin evel an oll gloherien, a gavas an doare d'e zihuna.

« Pemp en daou benn! » emezañ, dre ma helle youhal.

— Boud! eme ar person, en eur zihuna krenn.

Hemañ a dlíe beza heñvel outañ, hanter gousket.

« Paour kaez Lanbaol, a lavare tud Gwitalmeze, pebez paour kaez person a zo digaset dezi! »

✱

Neuze, ne veze ket c'hoaz lakeet ar veleien war o zron gand kement a enor ha bremañ, ha d'ar zul war-lerh ar person nevez e-unan a ganas an overenn hag a bignas er gador.

« Eun tamm mored! » a lavaras Lan Gouranou da Viel Kerivinog. Hag an oll, er skabeliou, war ar hadorioù, a azezas evid selaou prezegenn ar person nevez, en eur voredi.

Hemañ a zellas eun tachad war e dro, evel evid muzulia eul leur, hag e lavaras:

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen!

« Me ne gomzin ket deoh a draou ha ne helloh ket kompren. Me a gomzo deoh euz ho saout.

(Ar wazed, ar merhed a zavas kerkent o 'fenn soublet

— Klev 'ta, gal! eme Viel da Lan.)

« Ya, euz ho saout! Saout ho-peus, saout mad, saout lard, ha me, bet kure koulskoude pell ahalen, e Gwipavas, em-eus klevet pell zo meuleudi saout Lanbaol.

(Bi Kerogan a rankas distarda e houriz evid lezel da dremen ar haol.)

« Ho saout, gand ar yeot druz a zav en ho foenneier, foenneier Kerreter, Kerzivoret, ar Ribl, ar Harrpont, Kerc'hign, ar milinou, beteg Kerlozvezou, ho saout a ro laez a flao, hag amann n'eus ket par dezañ e neb leh.

(Boutonou a strakas, krochedou a zirapas war rochedou ha war saeou tud ar heriadennou-ze.

— Pennad gal! eme Lan da Viel. Sed amañ unan avad, paotr! A-veh m'eo en em gavet e Lanbaol ma anavez an oll 'foenneier!)

« Ya, zoken foenneier Gouranou, beza m'int tost da Witalmeze ha ma ne bakont ket kement a avel vor, rag an avel vor, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, a zo leun a holen hag a draou all magadur enno, foenneier Gouranou n'int ket fall kennebeud.

(Paotred Gouranou a jeñchas tu d'ho chikad en o genou. Lod zoken a lonkas an hanter anezañ.)

« Mad! ar person digaset deoh, ne ouezit dare c'hoaz, e-neus desket, en uriaou koz hag er re nevez, an oll draou bet skrivet, abaoe ma ouezer skriva, diwar-benn ar zaout.

(— Klev 'ta gal! klev 'ta gal! eme Viel da Lan.)

Ar zaout a zo teñzorioù dispar roet deoh gand an Aotrou Doue! Arabad ankounahaad lavared bennoz dezañ, Lanbaoliz, da veza roet deoh saout gwelloc'h eged oll zaout ar bed. Rê all o-deus ankounaheet renta bennoz dezañ evid e vadeleziou. Klevet ho-peus kaoz diwar-benn Sodom ha Gomor. Eno e oa tud ive hag o-doa leun a zaout ha traou all. Ankounaheet o-deus an Hini a lak

ar peuri da zevel, hag eun deiz int bet lakeet e ludu. Netra ne boulzas mui goude en o douarou deuet da veza seh evel tevennou Treompan. D'an daoulin mintin ha noz en aon na deufe da lakaad e ludu ho saout hag ho traou !

(— Ya, gwir a lavar, gwelloc'h eo en aon, eme Lan da Viel.)

« Ar zaout a zo teñzoriou dispar, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, med an teñzoriou a ranker beilha warno. Ho labour eo. Krenn o-deus ar zaout an er da veza, med an disterra tra a-wechou o lak da gleñvel ha da vervel.

(— Ya, gwir a lavar, eme Viel da Lan. Bioh ruz ar Rible n'oa ket bet pell en deiz all.)

« Ha maro eur viorh yad, pebez koll evid eun tiegez bihan !

(Mari Jako he-doa nevez kollet he hini a rafourchas he godell, a dennas er mēz he mouchouer fri braz ruz-tan, a zehas he daoulagad hag he chodou leun a zaelou.)

« Ar veneh gwechall, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, a zeskas d'ho tudou labourad an douar ha sevel chatal ive. Pa veze klañv ar zaout amañ, ne veze ket ezomm da vond da Lokornan da glask eul louzaouer. E-pad ma vezer o vond di, eur hraouiad saout e-neus amzer da vervel.

(— Gwir a lavar, eme Viel da Lan.)

« Evel ar veneh koz, me eo a louzaouo ar zaout klañv.

(An dud, souezet maro, a lakaas o fenn a-dreñv d'ober eun dro war ar skebell hag ar hadoriou.

— Aevñ ? Aevñ ? eme Viel ha Lan o-daou asamblez.)

« Ha m'hel lavar deoh, ya, euz a gador ar wirionez, e-pad ma vin me person e Lanbaol, ar zaout ne varvint nemed dre gozni, pe dre vorzol ar higer. Hini ebed, nann, hini ebed dre gleñved, ma teuit abred a-walh d'am gervel !

(An dud, gwazed ha merhed, a lakeas o fenn a-dreñv d'ober, war o skebell ha war o hadoriou, daou pe dri lamm evel ma ra ar zaout war-nez mond e breskin.

— Pennad gal ! Pennad gal ! Pebez person ! eme Viel ha Lan o-daou asamblez.

(Ar c'hoant kousked a oa pell. Morse tud Lanbaol n'oant bet ken dihun.)

« Hoh eürusted, war an douar zoken, me am-eus an dever d'her blask evidoh. Hag henn ober a rin. Pa 'z a mad ar zaout, e vez laez da eva, laez d'ober yod, hag amann war ar bara. Pa ya mad ar zaout en eun tiegez, an oll draou a ya mad hag an oll a vev laouen.

(— Gwir a lavar, eme Lan da Viel.)

« Med, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, n'om ket greet evid chom amañ. Eun deiz, ni a ranko dilezel ar vro gaer-mañ evid mond d'eun all c'hoaz kaerroh. Red e vo deoh kuitaad ho tiegez hag ho saout lard, ar re o-deus leun koulz hag ar re n'o-deus nemed unanig.

« Eun ene ho-peus ! Daoust ha soñjal a rit ennañ ? Daoust ha pa vezit, paotr pe merh an « orvintin » vak en ho parkeier, o tiwall ar zaout, dirag an oll draou kaer a zo war ho tro, daoust ha sevel a rit ho spered war-du Doue ? Daoust ha selled a rit aze en ho tiabarz, oh en em houlenn e peseurt stad emañ en e geñver ?

« Ma n'her grit ke, n'eo ket mad ! Red eo henn ober, va breudeur ha va c'hoarezed kristen !

« Ar zaout a vag ho korv. Me a vezo evel eur viorh karget gand Doue da vaga hoh ene. Mad e kavit laez livriz, laez dienn dre zienn ?

(— N'eo ket fall an oll, eme Viel da Lan.)

« Me a rido laez d'ho ene, laez livriz, laez dienn dre zienn, gand va frezegennou, va huzelioù mad er gador-govez hag en ho i.

« Arbad deoh lezel al laez avad da dreñka, na da vond e tourgouilh. Al laez treñk hag al laez tourgouilh n'int mad nemed da larda moh. Dalhit va laez e stad da wellaad an eneoù.

Gouzout a rit gand eun tammig goell ober laez hir.

(— Ar riv ? eme Lan da Viel, me a gaje din e veze greet gand eun tammig koh leue.)

« Evid mired ouz al laez a roin deoh da dreñka ha da vond e tourgouilh, e rankit e lakaad da genta en eur girin kempennet mad. Deuit aliez dre ar zakramañchou da gempenn ho kirin.

« Ha goude-ze lakit ar goell gand al laez, da lavared eo, ar youl d'ober euz ho kwella, hag ivé eun tammig kroaz degemeret bemdez a galon vad, eun oberenn a garantez.

« Setu aze, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, ar goell a viro ouz al laez a roin deoh da drei. Hoh ene ne vo ket pell evid dond da vad da veza kaer ha krenn, ma kirit, gantañ.

« Eun dra all am-eus bremañ da lavared deoh.

(— O ! beteg warhoaz ma kar, eme Lan da Viel, al Lan-ze en em glemme kement gwechall abalamour ma veze re hir ar prezegennoù.)

« Pa lezit ho saout a-vandennadou war an tevennou, e peb bandenn, her gwelet ho-peus koulz ha me, e teu aliez, goude tourterez er penn-kenta, eur viorh da veza mestrez ar re all.

(— Briz e va hēr-me, eme Viel da Lan.

— Rastell e va hēr-me, eme Lan da Viel.)

« Hag an oll goude a rank senti pe o-deus da ziwall. Mad ! Amañ n'eus ket ezomm d'en em ganna. Me eo a zo karget, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, gand an Aotrou 'n Eskob, gand ar Pab, ha gand Doue, d'ho ren war hent ar Baradoz.

« Henn ober a rin, kousto pe gousto. Ho kared a ran ! Med ne fell ket din, avad, abalamour deoh, paka deiz ar varn va fegement ha mond d'ar Purkator da zuiha !

(Unan pe zious vaouez a skrijas evel ma ve bet c'hwenn kas ouz o drailha.)

« Me a ray va dever !

« A-wechou e vezit souezet o weled ar viorh dibabet gand ar re all da vestrez. Hanter strobet eo, koz hag hanter luch. « Evid gand hounnez, da vihanna, a zoñjit, ar zaout all a hello kemered o frankiz ! »

« Evez ! evez ! va faotred. It da varn ar zaout hag an dud diouz o doare ! Hounnez, m'hel lavar deoh, he-deus kerniel hag a oar c'hoari ganto, divesker he-deus ive ha gwazied mad enno, ha ne vez ket pell o tihagni tennou gand ar re all.

« Mad, en desped d'an doareoù, me a zo heñvel.

(An dud a zigoras o daoulagad evel brennig hag o genou evel skudellou da zelled ouz o ferson nevez.)

« Ya, dioustu krak ha berr. N'em-eus aon rag gwaz ebed amañ. Ha peogwir e leverer eo gwasoh ar merhed eged ar wazed, ar pez a gredan stard, n'em-eus aon rag maouez ebed amañ.

(Ar merhed terrupla a zoublas o fenn, evel m'o-doa greet pell zo ar wazed gouesta. Ha bremañ an oll, krommet o hein evel m'o-defe aon e kouezfe warno toenn an iliz, ne zavent ken nemed o daoulagad du war-du ar gador.

« Ma ne valeit ket mad, me 'm-eus kerniel, paotred ha merhed, hag a ouezo c'hoari ganto. Treid am-eus ive, hag evel ar zaout, ne dennin ket va boutou evid rual !

« Urz a vezo er barrez-mañ ! Me a zalho ar stur :

An neb na zent ket ouz ar stur
ouz ar garreg a yelo sur.

« Da zul, da genta, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, an oll braz ha bihan d'an overenn ha d'ar gousperou ! Tud an « orvintin » hebken er gêr !

« Pa glevint klōh ar gorreou, e ouezint e vezo poent dezo troha bara d'ober ar zoubenn ; pa zono an anjelus, aoza al lipig.

(— Klev 'ta gal ! eme Lan da Viel.)

« Ha pa vezoh bet war ar beziou, selaouet ar pez a vo lavaret war ar groaz hag an oll d'ar gêr dioustu.

« Ar re a zo pell koulskoude evel tud Gouranou, c'hwil, tud ar penn-mañ, a rank o degemeret en ho ti da leina. Ya, peb hini d'e dro, ha me a ray, evel ar re all, er presbital.

« O ! eme Vari Kov-yar da Zoaz heh amezeged, da leina d'ar presbital ! Na pebez person mad e-neus degaset deom an Aotrou Doue ! Ha Lan Gouranou a lakaas adarre e benn a-dreñv d'ober diou pe deir zro war e gador. »

« Ha goude lein, c'hoari peziou boulou, kilhou war al leur-gêr, rag c'hoari a ranker ive beb an amzer. »

(Ar re yaouank a zavas o 'fenn, laouen meur, fouge enno.)

« An oll en-dro d'an iliz evid ar gousperou ! Pa glevint ar hleier o seni d'ar *Magnificat*, e vo poent da dud an orvintin degas ar zaout d'o hraou er goañv hag aoza mern vihan. »

« Ne fell ket din da zul gweled tud en tavaruiou oh en em vezvi. Ar zaout ne reont ket a re gorravajou. C'hwil kennebeud ne dleit ket ober tortadou. Ha ne lavaran ket ne ve ket mad eur banne beb an amzer. Ne ra ket a zroug, med arabad eva re ! E-pad ar zizun, evit laez, n'eus netra gwelloc'h. Eur bannig da zul, med peb hini a rank chom gouest da jarread e garr dre ar strêjou e Lanbaol. »

« Beilhit war ho pugale ! Beilhit dreist-oll war ho yaouankizou. Gouzoud a rit e pardaeziou an hañv e pelch eo strapennet ho saout. Red eo ive deoh gouzoud e peleh eo strapennet ho mab pe ho merh. Kleved a rit ! »

« Da gloh an anjelus, da zul evel d'ar pemdez, peb hini d'e graou ! »

« Meur a dra all am-bije da lavared deoh c'hoaz. Med arabad rei re a laez d'ar vugale en eun taol, pe e chom war o stomok. A-nebeudou m'her roio' deoh. C'hoanteet em-eus hebken ho lakaad da weled fraez ar pez a zo ouz ho kedal. Ho person nevez a ray evidoh oll ar pez a hello evid hoh eurusted war an douar-mañ, evid dreist-oll hoh eurusted er bed all. Ma rit ho penn fall, ma teu deoh c'hoant mond e breskin, ha neuze avad eo gwelloc'h gantañ, dre eur garantez wirion evid hoh ene, rei deoh taoliou korn ha ruadennou euz ar gwasa, kentoh eged ho kweled, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, sammet evid mond d'an tan a bado da viken, etre kerniel an diaoul. Evel-se bezet greet ! »

(Pe...pe...pe...pebez person ! a lavaras Nan an Toull a oa bestead. Lan ha Biel a hejas o bizied dirag o fri.)

« Credo in unum Deum... » a ganas ar person.

Tud Lanbaol a gendalhas, oll unanet, gand eur vouez ken skiltruz ma tregerne ar gwer war an iliz. Morse n'o-doa klevet eur brezegenn ken êz da heul. O halon vad a oa leun a geuz d'o buhez tremenet, hag heulia a rafent oll ar person burzuduz-se degaset dezo gand Doue.

Ar paperiou koz, sinet gand ar Mêr ha Kuzul an iliz, a zoug testeni ne varvas bioh ebed e Lanbaol, dre gleñved, e-pad an ugent vloaz ma chomas ar person brudet-se gand Lanbaoliz.

Ha n'eo ket ar zaout hebken eo a anaveze. Evel ma vije bet sklêrijennet war beb tra. Eñ eo a zekas da dud Lanbaol ober anduilh ! Gand eur wialenn e kavas dour d'ar heriadennou evel Kergounan ha Kergengar n'o-doa ket a buñsiou. Eñ eo a zavas ar feunteun e-kichen ti Jobig Fanchig, en eur ziskouez e teue an dour, nann euz ar vered, med a-zindan liorz Jan an Dous. Eñ a lakaas sevel Kroaz Wenn, rag eno e oa net gwechall eun aoter d'ar fals doueou, hag e oa tud c'hoaz hag a yee di en noz d'ober taoliou sorsêrêz.

Nag a draou a reas e Lanbaol ! Gantañ ar barrez a deuas da veza eüruz evel n'oa bet biskoaz. Er foariou ne veze ken kaoz nemed euz saout lard Lanbaol. An amañ a zegase arhant hag êzant. Zoken ar paour, dre garantez evid Doue, med gand aon rag kerniel ar person, a veze roet dezañ e peb leh, evid netra laez dienn dre zienn.

An aotrou person e-unan n'e-noa ket ezomm mui, evel ar re all bet en e raog, da vond da Zant-Pabu da gerhad eur sahad farz d'ober farz buan hed e

zizun. Nann ! Bremañ e-noa trawalh da rei d'ar re all d'e dro. Ha da lein ar miz e veze boeturiou euz a di Ber ar Fourn beteg Kroaz al Leur-gêr.

E vrud en em astennas dre ar vro a-bez, hag euz a-bell, euz a Dreglonou, euz a Lokornan zoken e teued d'e glask evid para ar zaout klañv.

Merhed Lanbaol a oa fouge enno, m'hel lavar deoh, hag en em lakee da roda sounn o 'fenn, pa glevant e peb leh meuleudi o 'ferson, dirag merhed Gwitalmeze. Ar re-ze avad a ree eur fri ! N'o-doa ket, den ebed n'e-noa eur person evel hini Lanbaol.

Eüruz war an douar, tud Lanbaol a valee renet dreist war-du eürusted peurbaduz an Neñv.

Hiniennou, poulzet gand o youlou fall diêz da ziwrizenienn, a glaskas enebi eun draig. Med ne badas ket pell an abadenn. Ar person a ouie c'hoari gand e gerniel ha gand e voutou en eun doare sebezuz, ma oa gouest da sponta eur vandenn ziaoulou.

An oll a blegas.

Lanbaol a deuas neuze da veza al liorzig santel ma chomo bremañ da virviken, eul liorzig dudiuz, eul liorzig hag e teu ennañ an Aotrou Doue e-unan da gerhad bleuniou dispar a gas d'e liorzou all er bed, evid hada drezo e peb leh c'hwez vad e garantez.

Pe...pe...pe...pebez Person !

Gwir a lavare Nan an Toull.

DIWEZ SAOUT LANBAOL

Mab an Dig.



TENZOR AR BREZONEG BEO

9. Aner.

[F. F. orin. Dre al latin *angaria* hag ar gregaj *aggaria* ar gér a deu deom euz bro hinidig an avalou pechez (persica galleg pêche) euz ar Pers.]

Aggaria oa er vro-ze ano ar zervij dleet evid dougen keleier ar Roue dre ar vro, ha goude evid kempenn an heñchou, pe ober n'eus forz peseurt labour evid netra dre urz ar Roue. Pa lavar Aviel Sant Vaze e oe kemeret Simon ar Cyrenean da zougen ar Groaz warlerh Or Zalver, eh implij eur verb hag a zinifi « lakaad da ober aner, da labourad evid netra e kont ar gouarnamant. » (Ernou-Meillet, Dict. étym. de la langue latine.)

« *Derveziou aner* », derveziou-labour greet war an hent braz evid paea an tailhou ; ne vezont ket paeet evel-just.

« *Er zizun-mañ ez aim da ober on derveziou aner.* » Peurvuia an aner a veze greet war an heñchou : terri mein, chalbotad mein, mond da heul ar « rouleau » pa vezed o renevezi an hent, setu perag e vez lavaret ive « *ober derveziou hent braz.* »

« *Warhoaz ez aim d'an aner.* »

Anad eo deoh ne veze ket torret kalz ar horv en aner !

« *Labourad stard a rit, gweled a ran n'emaoh ket oh ober aner.* »

Pa 'z eed da labourad diouz an deiz e vezed bevet, sklêr eo. Pa 'z eed d'an aner e ranked kas ar boued ganeor. Diouz an dra-ze ez eus bet savet eur doare-lavar all. Eur paotr yaouank, naon dezañ a ziskolp eur peziad tamm bara diouz an dorz hag e vo lavaret dezañ : « *Petra ! d'an aner emaut o vond ?* »

10. Abostol.

« *Setu aze eun abostol avad.* » (Gorre-Leon) unan hag a zo dreist ar re all war boent pe boent, eur gér a damall eo kentoh. Eur paotr yaouank ha ne ra nemed e benn e-unan, ha ne zent ouz den : « *Setu aze eun abostol avad !* Koulskoude e ranko beza kabestred ive deiz pe zeiz. »

A-wechou e vez lavaret : « *Setu aze unan avad !* » pa vezer souezet, feuket... gand komportamant unan bennag.

[F. F. Diwarbenn meur a hini, er ster-ze e vez lavaret *abostoled* kentoh eged ebestel.]

11. Aez.

1) « *Diouz an êz*

« *Eo kas ar zaout er mêz.* »

(Skrignag, Perrot, 1941). Da lavared eo e ranker reizha an dispignou war ar gonidou.

Korn-Broïou all a zo hag e vez lavaret : « *Ober an tan diouz ar heuneud.* »

2) « *En e êz ema* » (n'eo ket paour).

« *Diouz da êz e labouri* » (Arabad eo dit en em skuiza re).

12. Ahela.

« *N'on ket evid ahela gand va breur kaer* » (N'on ket evid en em gleved mad awalh gantañ).

13. Alarm.

Pa vez an tan-gwall en tu bennag er barrez e vez sonet an « *alarm* » gand ar hleier, evid gervel an dud. E Kleder e vez lakeet unan euz ar hleier braz war vole, eur hloh all a vez tintet ; diou dintadenn stank etre peb taol d'ar hloh war vole. An doare sini-ze a skoe war nervedennou an dud. Klevet am-eus ive an « *alarm* » o sini e miz Eost 1914 p'edo an tan war harzou ar vro. Pell on bet araog gouzoud oa ar gér-ze eur gér brezoneg deuet euz ar galleg, daoust ma veze distaget gand an taol mouez war ar zellabenn ziweza.

Ar gér-ze n'ema ket er gériadurioù brezoneg. Marteze ez eus bet klasket re skarza ar brezoneg euz gériou 'zo hag a oa galleg pe latin a orin, med eet don er yez hag a zo ganto blaz ar brezoneg evid ar vrezonegerien. Aliez ar ster roet dezo e brezoneg eo ar ster o doa gwechall e galleg, disheñvel awechou euz ar ster roet dezo bremañ. Kaoud a rañm hoaz gériou evel-se ; pell 'zo eo bet digoret dezo dor ar brezoneg, o skarza kuit a vefe paourraad ar yez.

14. Anad.

« *Anad (pe aned) eo dit goùd ervad n'on ket chomet da hortoz* » (sklêr eo dit...). Kleder.

15. Ano.

« *Kaoud war an ano* » : beza perhenn. « *N'e-neus ket nemeur a dra war e ano.* »

16. Aluzen.

« *Aluzen diwar aluzen*

« *A laka an Aotrou Doue laouen.* »

(Skrignag, Perrot, 1941.)

[F. F. Gér deuet euz ar gregach *eleēmosynē*, « truez, ar pezh a roer dre druez », tennet euz euz ar verb a gaver e Kyrie eleison « Aotrou, ho pet truez ». — *Aluzenn* a rankfed da skriva e brezoneg, pa zistager daou « n » e aluzennou, aluzenner].

17. Anch'al.

(ano gwan) : riskluz. « *Anchal eo hada d'ar poent-mañ* » — « *Anchal eo an amzer* » (Plouarzel, Marb Arzel 1942).

18. Annev.

« *Ponner evel eun annev-govell.* »

19. « Angelus ».

E galleg e vez lavaret 'peurvuia « *angelus* » « *c'est l'ange qui sonne* ». E brezoneg ive : « *Pa zono an « angelus » e savim diwar on labour.* » Koulskoude e Gorre-Leon eo souezuz gweled pegen nebeud eo bet kristenet son ar hleier. E Kleder ne vez lavaret « *an Angelus* » nemed ral a wech.

Lavaret e vez : *Kloh an deiz, ar kreisteiz. Kloh an noz.*

« *Poent eo sevel, sonet eo kloh an deiz — Pa zono ar kreisteiz...* — Hirio, derhent gouel Maria-Hanter-Eost, e vo lakeet ar tri gloh war vole *evid kloh an noz.* »

Pa oan yaouank, ar hloh a zone hoaz eur wech, eun eur goude kloh an noz hag a veze anvet *kloh an digouvi*. Vallée a ra meneg anezañ (couver-feu). *Digouvia* a zinifi lakaad er mêz euz an ti. Pa zone ar hloh-se e veze digouvi ar pratikou en ostaleriou ha prenet an nor. An archerien a ree neuze tro an ostalirioù da weled ha sentet oa bet.

[F. F. Orin. Digouvia a zo savet diwar *kouvia*, e galleg « convier ». Ar gér-mañ a deu e-unan euz al latin « *convitare* » a zo bet implijet e kichen « *invitare* » evid lavared : pedi da eur fest pe *convivium* « *banquet* » (Hervez Bloch ha von Wartburg.)]

20. Ao.

A responder pa vezer galvet evid diskouez e vez klevet hag evid gouzoud hirroh.

« *Per !... Per !...*

— « *Ao ! (oui !... qu'y a-t-il ?)* (Kleder).

21. Aouli.

Eur stlabez man glaz hag a zav war an dour, en hañv. *Glandour* e Leon, *gloaneg* e Fouesnant (Skrignag, Perrot, 1941).

[F. F. Glandour a hell beza evid gloan-dour.]

22. Aozedet.

« *Bleud aozedet* », bleud pouloudennet dre gozni. (Plouarzel, Mab-Arzel, 1942.)

23. Apell.

Diwezataad eun dra bennag hag a zo bet divizet ha deiziet. (Kleder.) « *Apellet eo an eured.* » Kaset pelloh. « *A forz da apell* ne vo ket dornet an eost araog ar goañv. » — « *A apelladenn da apelladenn ez eer...* »

E Plouneour-Trez e vez lavaret « *empellaad* ».

V. F.



KELEIER

AR PRIZ FRANÇOIS DE NEUFCHÂTEAU D'AN AOTROU ROGER KERVRAN

Levr an Ao. Kervran diwar-benn *Laennec* a zo bet meulet gand an oll o-deus henn lannet. Laouen om bremañ o houzaoued ez eo bet kinniget d'ar Breizad gouizieg-se ar priz *François de Neufchâteau* krouet evid lorea beb bloaz eul levr savant gand eur medisin. Pez a zo souezuz avad eo m'en em gavas nehet ar varnerien : darn o-doa dibabet oberenn an Ao. Kervran ha darn all al leor « Mort d'un médecin » savet gant an Ao. Georges Desse, medisin e Kemper. Kement ha diskouez n'eo ket ar skrivagnerien vad eo a ra diouer e Breiz, na danvez levrioù talvouduz.

gand ar vez !

Tud 'zo hag a zeblant beza war an douar evid dispenn, louza pe mired ouz labourioù ar re all da vond en-dro. Ne houzanvont ket o-defe ar re all menozioù disheñvel diouz o re, e labourfent en eun doare ha n'eo ket o hini.

Gouelioù ar Bleun-Brug, gouelioù poblek mar deus, n'int evito nemed « termaj », pe gouelioù meurlarjez. E peb giz, e taolont warno, heb ehan, o 'fae hag o disprij. Se, avad, a zell outo ha na ra deom netra pa n'eo ket or gouelioù savet evito.

Ar pezh ne gomprenom ket, avad, eo e klaskfent en em vataad euz or gouelioù evid gwerza o 'faperioù. Pa n'eo, evito, or gouelioù nemed « termaj », ra jomint pell diouto ! Ne vezim ket feuket. Ra zavint gouelioù poblek o-unan, hervez o zoñj. N'eo ket ni, a-dra-zur, eo a yelo da drubuilha dezo o gouelioù, gand paperioù pe draou all ha ne blijfent ket dezo.

Ahanta ! paotred, eun tammig bolontez vad gand eur gwennegad a zevenadurez, ha peb hini a hello labourad e peoh war dachennou Breiz.

devez ar brezoneg

Lavared a hellom e-neus Yves al Louz greet eul labour meur en-dro da zevez ar brezoneg. Frouez e labour hag e boan eo bet an devez-se. Laket e-neus an devez dindan paeroniezh eur homite evel n'ez eus bet gwelet biskoaz. Ar homite-ze a ziskouez n'eo mui ar brezoneg tra hemañ pe henhont, med tra an oll. Aze eo ema, d'am meno, an nevezenti pouezusa.

Poblek eo deuet an devez-se da veza ha se a zo ive eun nevezenti vraz, rag kaer a vezo ober, ne vo ket salvet ar yez er-mêz euz ar bobl. Da houmañ eo da lavared pe e fell dezi derhel d'he yez pe ne fell ket. Distroet eo bet diouz he yez gand politikerezh an amzer dremenet. Deom-ni d'he digas en-dro. Amañ, avad ez eus da deuler evez. Red eo gouzoud penaoz he hemered. Eur gêr a-dreuz, eur gêr re galet, doare ober kasatiz tud 'zo, a vefe a-walh evid distruja al labour vad greet beteg-henn.

Arabad e vefe mesket devez ar brezoneg gand eur politikerezh bennag. Arabad e teufe da veza eun devez er-mêz euz lezennou ar vro. Arabad e vefe klasket rei arhant ar gest d'eur hef ha n'eo ket an hini a zo digemeret gand ar houarnamant, da lavared eo an F.C.B. Ober en eun doare all a vefe lakaad an distizians da zevel, rei tro d'ar journalioù da gomz eneb deom, ha lakaat e riskl devez ar brezoneg e-unan. Ar re ne gavont ket mad doare ober an F.C.B. ra jomint er-mêz euz devez ar brezoneg. Gwelloc'h e vefe kaoud 500.000 lur nebeutoc'h eged lakaad an devez da goueza, rag n'eo ket hepkén ouz an arhant dastumet eo ez eus da zelled, med ouz an efed e-neus an devez-se war spered an dud.

E Breiz-Izel a-bez ez eus bet kestet. Bugale ar skolioù koulz ha yaouankizou ar helhoù, bagadoù ha lazou-kana, o-deus astennet an dorn heb mez, er hêrioù, er bourkoù hag er heriadennou war ar-mêz.

Tri bloaz 'zo, e veze greet goap ouz ar gesterien ; hirio e deuet ar gest da veza naturel. Warhoaz e vo eun enor kestal ha rei.

En eur skolaj a anavezan, ar vugale vraz o-unan o-deus greet ar gest. Heb mond er-mêz euz ar skol, e-touez o hamaraded, o-deus dastumet 5010 lur. — Eur skolaj all e-neus kestet 12.000 lur. Se a zo kaer ha kalonekañ.

Ra vézo amañ trugarekeet Yves al Louz, sekretour meur an F.C.B. Nebeud a dud a zo hag a oar al labour ramzel e-neus greet. Hag ar re a glasko pismiga pe teuler o billm, n'eo ket ar re o devezo bet labourer ; n'eo ket ar re a vezo bet gwelet war an heñchoù oh astenn o dorn, n'eo ket ar re a vezo bet o redek da gas tikejou d'ar skolioù.

B. B.

Bleun-Brug Lanniliz

13-14 a viz gouere 1957

Bleun-Brug Lanniliz, d'an 13 ha d'ar 14 a viz Gouere a zeu, a vo BLEUN - BRUG BRAZ 1957.

Oll vignoned ar Bleun-Brug euz Breiz hag euz Bro-Hall a-bez, en em gavo eno en deiz-se.

Bleun-Brug Lanniliz a vo, e gwirionez, Pardon braz ar Vretoned : eur pardon breizad.

Renet e vo ar gouel gand an AOTROU 'N ESKOB ROLLAND, ginidig a Zanteg hag eskob e Madagascar.

Lanniliz, hag an oll barrezioù diwar-dro, a zo en o gwir wella o labourad, evid ma vo kaer ar gouel.

SETU AMAN ROLL AR GOUEL.

D'AR ZADORN 13 : da 21 h. en iliz « KANOU SANTEL », dindan renêrez Paul Le Flem, gand kanerien Bro-Leon euz Landivizio. — Bennoz ar Zakramant.

D'AR ZUL 14 : azaleg 8 h. 30, e skol ar Frered : KENSTRIVADEGOù evid tud vraz ha bugale.

DA 11 H. : OVERENN-BRED. Ar han a vo roet gand Lazou-kana Plougerne ha Lokournan-Leon.

DA 14 H. 30 : E MANER AR ROUAL : KOROLL, SON HA KAN ha C'HOARIVA VRAZ AN ABERIOù savet gand Jean Le Bars, abadenn roet gand Lanniliz ha Plougerne, hag an oll barrezioù diwar-dro. Eno e vo gwelet e 16 taolenn, kaerra pajennoù istor Bro-Leon. — Da heul e vo prosesion vraz parrezioù Bro-Leon, ha Bennoz ar Zakramant en Iliz.

DA 21 H. 30 : C'HOARIVA BREZONEG er patronaj gand strolladoù Lanniliz ha Plougerne.

C'hwil hag a gar FEIZ HA BREIZ, deuit da LANNILIZ. Ne gavoh e nebleh eur pardon kaerroc'h nag eur gouel breizekoc'h.

C'HOARIVA BREZONEG, ER PATRONAJ : C'hoarierien Lanniliz, da 21 h., er patronaj, a roio daou bez-c'hoari brezoneg : MARI BEG AN DIAOUL ha GOELL BIER savet gand an Ao. Noel, person Plonevez-Kintin. War-lerh, da heul kanaouennou laz-kana Plougerne, e raim eun dro Vreiz euz ar re gaerra.

Deuit niveruz da weled c'hoariva brezoneg Bleun-Brug Lanniliz d'ar 14 a viz Gouere.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697



kan ar vogalennou

pezig-c'hoari da veza kanet gant bugaligou



Ha kle-vet ho-poa? a a a a a Tour i-liz Lan-de



da Zo cho met da ve ga a e i o u

Unan a gan: Ha klevet ho-poa?
Ar re all a gan: a a a a a.
Unan a gan: Tour iliz Landeda — Zo chomet da vega.
Ar re all, an êr souezet, a houlenn: Tour iliz Landeda — Zo chomet da vega? O la la!

Unan all: Ha gwir eo kement-se?
Ar re all: e e e e e.
Unan all: Her hredi a rin-me — Pa welin an tour-ze.
Ar re all: He! He!

Eun trede d'an eil: Gwelloc'h dit mond di.
Ar re all: i i i i i.
Eun trede d'an eil: E Landeda weli — Eun iliz tour outi.
Ar re all: Tour outi? Tour outi?
An eil a ya kuit diwar al leur-c'hoari.

Eur pevare d'an oll: Gwir, eun tour a zo.
Ar re all: o o o o o.
Eur pevare d'an oll: Ha gwir beget eo — Med eun tammig re deo.
Ar re all: Ho! Ho!

An hini kenta: 'Benn ma vo erru.
Ar re all: u u u u u.
An hini kenta: Ganeom e vo echu — Horbanaouenn. Setu.
An oll, goustad goustad, o poueza war beh lizerenn: a e i o u.

E-leh beza kanet a hell beza displeget.

L. Lok.

